

## Kan-Nij an Had

Atav, bepred, dalc'hmat !  
En avel 'mañ an had!  
Treiñ ha distreiñ a ra  
A-hed aodoù Plouc'ha !

'Vel va c'halonig paour,  
E c'hall kouezhañ en dour !  
'Vel da galon leon,  
E c'hall nijal eston !

Davet enezeier,  
Sioul a-dreñv o reier,  
Tintajel, Avallon,  
En tu all d'ar mor don !

Inizi kaer meurbet  
Ma tiskuizh ar Gelted,  
Goude bezañ treuzet  
Harzoù kuzhet ar bed !

Atav, bepred, dalc'hmat !  
En avel 'mañ an had !  
Treiñ ha distreiñ a ra  
A-hed aodoù Plouc'ha !

Eus ar Palud, an had  
a ya d'an añs Kochad,  
hag eñ ha mont betek  
Lanneg ha traezh Brec'heg !

Distroet war e giz,  
D'ober tro an iliz !  
Gantañ 'vo saludet,  
Ar bourk hanter gousket !

Karget e Kervaria  
A levez ha joa  
E kouezh war e bouez  
Dirak n'Itron Werc'hez !

Kaset gant an avel  
Diwar leur ar chapel  
e sav uhel en aer  
A-us d'ur vroig kaer !

Atav, bepred, dalc'hmat !  
En avel 'mañ an had!  
Treiñ ha distreiñ a ra  
A-hed aodoù Plouc'ha !

'Vel va c'halonig paour,  
E c'hall kouezhañ en dour !  
'Vel da galon leon,  
E c'hall nijal eston !

Toujours, à tout instant, sans discontinuer,  
le grain est dans le vent.  
Il tourne et virevolte  
le long des côtes de Plouha

Comme mon pauvre petit coeur  
il peut tomber dans l'eau.  
Comme ton coeur de lion  
il peut voler de façon étonnante.

Vers des îles  
calmes derrière leurs rochers,  
Tintagel, Avallon,  
au-delà de la mer profonde.

Des îles magnifiques  
où se reposent les Celtes  
après avoir traversé  
les limites cachées du monde

Le grain, du Palus,  
gagne l'anse Cochad  
et continue jusqu'à  
la lande et la plage de Bréhec.

Revenu sur ses traces  
pour faire le tour de l'église  
Il saluera le bourg  
à moitié endormi.

Chargé à Kermaria  
de bonheur et de joie  
Il tombe de son poids  
devant Notre Dâme.

Balayé par le vent  
du sol de la Chapelle  
Il s'élève haut dans l'air  
au-dessus d'un beau petit pays

Toujours, à tout instant, sans discontinuer,  
le grain est dans le vent.  
Il tourne et virevolte  
le long des côtes de Plouha

Comme mon pauvre petit coeur  
il peut tomber dans l'eau.  
Comme ton coeur de lion  
il peut voler de façon étonnante.